

cholori

№ 19



С.Р.Т.А.Р. 68052. -Т.С.С.Н. 07601045. Эмбаргет гент аккарашил Кретионн Фрондел а.Л. Леваггеза.

Kazetonn viziek evit ar vugale. Miz Mezheven 1985. 12,00 L.

GLAV BEMDEZ!
 GWELL A SE!
 EVEL-SE E CHOMIN EM ZI,
 GET MA C'HREIONOÙ HA "CHOLOC'HOARI".
 "CHOLOC'HOARI" 48 pajennad c'hoarioù
 20 lur. E gwerzh e ti AN HERE
 16, stradae Jules Henriot
 29 000 KEMPER.

SAVET EO BET AN
 NIVERENN-MAN GANT:

- Daniel Doujet
- Tudual Huon
- Agnès Simon
- Martial Menard
- Pascale Chevillard
- Marivon Berr
- Divy Kervella
- Herve Kerrain
- Michèle Beyer
- Keven Doujet
- Yann Simon
- Gaëlle Pipet
- Damien Chapeau
- Steven Perron
- Guenael Rivoalland
- Line Bourdier

HAG
 EN NIVERENN-MAN:
 UL LEVRIG DA ZISTAGAN
 "ar golvan bihan hag
 ar c'hazh"!

Pajenn :

TAOLENN



- 3 un dresadenn da livañ
- 4 un istor lapined
- 5 ar sarpant-nij
- 6 ar struskañval hag ar golvan
- 7 ar c'hazhig
- 8 Fulupig-Fri-Furch
- 9 → 16 ar golvan bihan hag ar c'hazh
- 17 Lanig ha Loupig
- 18 → 21 Saig, mous bihan ar skrev
- 22 ar skeudenn guzh
- 23 c'hoarioù
- 24 Penaos e vez lavaret



un dresadenn da livañ

Dav vije bet lavaret din dont
 abretoc'h, Marivon... Dal! sunañ
 a ran peb tra ha naet an ti!!


un istor lapined



4

ar sarpant-nij:

e peseurt sarpant-nij eo krog Youenn?
(diskoulm e-barzh doenn ar serjant Garcia pajenn 24.)



5

Ar Struskañval hag ar Golvan

Ur wech e lavaras ar struskañval d'ar golvan :

-Te an hini a rank sentiñ ouzhin. Brasoc'h ha kreñvoc'h on egedout ha muioc'h a dalvoudegezh am eus. Gwall zister out-te em c'heñver !

D'an ampoent en em gavas ur bagad chaseourien. Gwelet a rejont ar struskañval ha tennañ a rejont warnañ.

Hag hemañ a varvas war an tach.

Ar golvan, eñ, a nijas kuit, yac'h ha dibistig :

Evel ma oa bihan ha dister, ar chaseourien n'o devoa graet van ebet outañ.


Ha derc'hel a reas gant e dammig buhez laouen ha seder...

Kontadenn eus Afrika ar Reter



AR C'HAZHIG

Ur c'hazhig kaezh
am eus
kavet
o kousket
e-barzh
ma
bolennad
laezh,
sukr peget war e fri gwenn,
war e vourrou
tapennoù dienn.



FULUPIG

erru eo ar
vakañsoù ; emañ
Fulupig e c'hoari
biz-meud war vord
an hent = bras ...



... daet eo an noz ha
n'eo ket bet kemeret get
den ebet !



a lenn ar fin, abret, da vintin,
e arrest ur c'harr-samm!



... ar c'hamion-poubelenn
e oa !...




Ar golvan bihan hag ar c'hazh.



un istor gwir saret ha trevet get : Gaëlle Pipet, Gwenael Rivoalland,
Yann Simon, Damien Chapeau 9 ha Stéven Perron .


kouezhet eo ar
paour-kaezh golvan
bihan diwar
e neizh.




e-barzh beg ar c'hazh
emañ bremañ.
Ha debret e vo getañ?



noon en deus
ar c'hazh
marteze !..




gwelet eo bet get ar c'hazh du
a sailh warnañ.



paour-kaezh bihan!

10

"Ne vo ket!"
a lâr an tad
hog ar vamm
golvan e fardiñ
warnañ.



aiou!
ma c'hein!

11


"ne vo ket!" a lar an tad-kozh.
"dait amañ, bisig!" eme-eñ
d'ar c'hazh ha buan e tenn
ar golvan bihan a veg al
loen du.




n'eo ket kontant tamm ebet;
diskouez a ra e grabanoù.

An tad-kozh eo, ar golvan
getañ en e zorn.

"kemerit-eñ!" eme-eñ da
z/daniel "ha grit mat war
e dro!"



"taou, taou, taou!". Tri zaol a stoker war
zor ar skol. Piv eo?



12

Un neizh golvan a oa just a-walc'h er skol
"fiskal" a lar daniel. lakaat
a ra ar golvanig e-barzh.



war ar gador e vo kaer dezhañ!


13

d'et eo daniel kuit; bremañ emañ Anjela, maouez ar c'hantin, e klask lakaat an neizh war fourchell ur wezenn... met al labous bihan fich-e-doull ne c'houlenn ket chomel fur.



get un alometenn e klask anjela lakaat minvig bara e-barzh beg al labousig. met ne ra nemet fichal!.. kaset vo d'ar skol en-dro.


met n'eus netra d'ober; e Keit ma oamp e c'hoari e-barzh porzh ar skol emañ nijet an tamm jibidoull kuit.



14

kaer hon eus klask e pep lec'h, n'omp ket evit lakaat an dorn warnañ!

e men emañ kuzhet?



golvanig!



Er skol emañ neoazh, klevet e vez e kuikal.



aze emañ!
war ar marc'h liv!
roz eo e lost
bremañ.

Kuik
Kuik

Kuik

Kuik


15

er-maez emañ an tad hag ar vamm
golvan e c'hervel o c'hrouadur.

Kuik
Kuik



Kuik
Kuik



Kenavo
an
distro!



Kuik
Kuik



"kerzhit da welet ho
tud, golvanig, ha
diwallit mat doc'h
ar c'hazh"



16

echu

DA BELEC'H EMAN LANIG HA LOUPIG
O VONT DA DREMEN O VAKANSOÙ ?

Evit hen gouzout, kemer lizherenn gentañ
pep hini eus an eizh tresadenn-mañ hag e
kavi anv ur gêr eus Breizh



1 	2 	3 	4 GROIK
5 	6 	7 	8

17

Report - PEMPOULL : 1. Penn) 2. E(vn) 3. Me(z) 4. Pemoc'h)
5. O(l)l(l)ant) 6. U(z)in) 7. L(oar) 8. L(o)godenn)

saig



Tapet eo "ar skrev" en ur gorventenn spontus...



morse ne oa bet ken rust ar mor!



Dihunan 'ra Saig. Emañ war an aod. Dianav eo al lec'h dezhañ...



pebezh bro iskus

pelec'h emañ Fañch?



delun 'ra ar friouezh a gav.



al loened a zeu d'e welet...

eurus eo



un deiz avat...

Piv oute?



me eo Saig! mousig ar skrev!



ha te eo soazig!



Souezhus eo:
n'eus bet
gwelst
brag ebet
o tremen



Ha Fañch n'eo
ket bet
gwelst kennebeut!



piv
'zo o
heyañ
ar
wezenn!



**DIHUN
'TA
SAIG!!**

?



Ma Doue!
peberzh hunvire
droch!!


20



felec'h
emaon?

(War "ar Skrev"
n'ompi ket
aet d'ar
strad!

15



SAIG! Sell! du-hont



O!O! Soazig!



Trugarez




al lampon-mañ a
rankez trugarekaat
Pannevetañ e vijez
bet kollet!

N'eus ken!

16

21



AR
SKEUDENN
GUZH

- 1: gwer -teñval
- 2: mouk
- 3: orañjez
- 4: glas
- 5: gwer -sklaer

C'HOARIOÙ


Y		N	N
S	O	A	
G	A		D
	E	N	A
M	A	R	
L	I		A

① Setu c'hwech anv bihan.
klask al lizherennoù
a vank ha ganto e
c'helli sevel un anv
bihan all.



② klask
adresañ
ar c'hwibon pe
al logodenn ...


...hep sevel da greion.



Penaos e vez lavaret?

"ter evel ur varrikenn"

a vez lavaret ag un den
daet da ront ter-ter, kofek,
ront evel ur varrikenn.



ar serjant Garsia a zo
ter evel ur

varrikenn!

- 135 L ar bloavezh - 70 L ar 6 miz.
- 120 L adal an eil koumanant.
- Koum. skoazell, adal 150 L.
- Broioù estren: 1 bloaz 155 L.
6 miz 80 L.

Agnès SIMON
29 Straed Dixmude
29260 LESNEVEN

Chekenn en anv AN HERE, **AN HERE**

Renerez ar gazetenn: Marivon Berr
Moulet e ti g/Klostr, mouler e
LANDERNE, Gourhent N 12,
29220, SANT TONAN.